

CANTIC SPIRITUEL

*Var sujet ar Brinces Judith, pehini
à zibennas Holofernes, Roue an
Egypt, dirac kær Bethuli.*

Var ton Santez Genovefa.



PELL bras zo em boa bet esper
Da implija lod va amzer
Da ober ur C'hantic breton,
Agreabl da bobl va c'hanton.

Rac se e meus sonjet erfin
E vije util d'am dessin
Trei a c'hallec e brezonec
Un histor gaer a meus cavet.

Speret Divin hac adorabl,
Bezit em andret favorabl;
Guerc'hes santel, va sicouret
Da zisclêria d'ar Vretonet.

Clêvet oc'h eus comz allies
Eus ar Roue Holofernes;
Un den cruel e voa meurbet,
Gant ur plac'h e voe dibennet.

Sonjal' eure dre e buissanç
 Ober d'ar bobl en assuranç
 E adori evit Roue,
 Ha memes evit o Doue.

Mes ar bobl eus a Israël,
 O veza da Zoue fidel,
 Ne felle qet dezo suji,
 Ma clasqas dont d'o zistruji,

Prepari eure un arme,
 Ma voa General varneze,
 En esper dont d'o massacri
 Dirac ar guær a Vethuli.

Ar bobl-mâ, fidel d'o Doue,
 A brepar ive un arme
 Evit sonjal en em difen
 Rac aoun demeus o bourrevien.

Ur Brinces gaer, hanvet Judith,
 O veza e kær Bethuli,
 A laqas choas da gommendant
 Alchior, dre ma voa vaillant.

Laqet e voa da Goronal,
 Yar arme Israël General;
 Petra benac n'oa qet Christen,
 En devoa joa ouz o lezen.

Me ho lèz da gonsideri
 Ar valiç hac ar jalousi
 En d'oa Holofernes ar Roue,

Pa vel preparet e arme.

Dont eure e-unan da c'houlen
 Ha c'hoant o d'oa d'en em difen ;
 Petra voa o lezen , o Doue ,
 Pa n'oboissent d'ar Roue.

Alchior dezàn a respondas :

Ar bobl-mâ o deus ur feiz vras ;
 O Doue a zo oll-buissant ,
 Ha Roue eus ar firmamant.

E buissanç a zo qer bras ,
 Ma sicour ar bobl dre e c'hraç ;
 Hep dale e teuint d'ho ranversi ,
 Mar teuit da glasq o forci.

Holofernes.

Te gomz evel un insolant ;
 Me rai dre ur gombat sanglant
 Dêvi ar guær a Vethuli ,
 Ha qément den a so enni.

Abars pemp devez hac liirio ,
 Mar bez beo , te sur a velo
 Oun brassoc'h eguet o Doue ,
 M'o lazo tout abars neuze.

Alchior.

Allas ! pobl paour , meravel zo ret ,
 Holofernes a zo fachet ;
 En em laqit en orêson
 Da bedi Doue a galon.

D'o sicour ellout resista
 En ur gombat evel houmâ ;
 Bras ha bian e ranquer mervel ,
 Nicun n'en devezo qarter.

Judith.

Va Doue , leunn a vadelez ,
 C'houi è hon Roue puissant iveauz ;
 Ho pezit sourci ac'hanoomp ,
 Ha qemerit truez ouzomp .

Na souffrit qet , ô va Doue !
 Ve ur maleurus a zeuffe
 A benn da derri ho lezen
 Ha da zistruch ar Gristenien.

Grit ma vezint oll punisset
 Evel an Egyptianet :
 Dre ho justiç hae ho rigneur ,
 Distroit ho pobl diouz maleur.

Ha possubl ve , ô va Doue !
 Ve ur miserabl a deuffe
 Da brofani hoc'h Ilisou ,
 Elec'h ma reomp hor pedennou !

Roit deo ur bunition ,
 Pa zint quer cruel , quer dirêson :
 Grit ma tigoro an douar cren
 D'o lounqa e punç an ifern.

Qen superb eo ar C'horonal ,
 Ma zeo leun a c'hoad ciminal ,

Hac e sonch hep hoc'h asistanç
D'hon laza tout nep repetanç.

En e nerz ma e esperanç ;
Mes c'houi , Doue , dre ho puissanç
Hac ho craç a ell hon souten ,
Ma vezimp fidel d'ho lezen.

O sortial eus e repas ,
Permetit , va Done , dre ho craç ,
Pa zeui ar güin d'en anteti ,
Ec'h alfen dont d'e zistruji.

Grit ma teuin da veza trec'h ,
Daoust peguen fêbl e ve va brec'h ,
Da drec'hi e benn d'ar monstr-se ,
A fell dezàn beza Doue.

Roit din-me ar gourach-se ,
Ha laqit em guinou ive
Comzou quer douç ha quer charmant ,
M'en decevin en un instant.

Hep ossanç d'am virginite ,
Permetit ma rin va antre ,
Ma ellin , pa vezø cousoet ,
Trêc'hi penn ar monstr milliguet.

Evit ma viot anavezet
Evit Doue partout dre'r bed ,
Roue puissant ha General ,
Crouer an ên hac an douar.

Va flac'h , ro din va boqedou ,
Va sarfum , va sandoreillou ,

Va habit leun eus a berlez ,
Ma zin da zaludi Holofernes.

Laquit prest en ur valizen
Peadra da veva ur zizun
Ebars er c'hamp gant an arme ,
Me rai ar salud d'ar Roue.

Leqomp en Doue hor fizianç ,
M'hor c'hunduo dre e brovidanç ;
Ne refus e c'hraq da hini ,
Pa zeuer gant feiz d'e adori.

Me ho ped , pobl a Israël ,
Mar doc'h en ho lezen fidèl ,
Da c'houlen sicour digantàn
Da resista er gombat-màn.

En em liquit en orëson ,
Pedit Doue a vir galon ,
Evit ma vimp victorius
Var Holofernes maleurus.

Eliakim , Roue santel ,
C'houi oll , Bêleyen Israël ,
Gant courach en em gonsolit ,
Hac evidomp-ni oll pedit.

Ur veach terrupl a antreprenàñ ,
Evit an oll e partiàñ ;
Dèc'h tout e lavarin adie ,
En em laquit dirac Doue.

Ar Vêleyen.

Mont a reomp gant ur voez huel

Da bedi an Tad Eternel
 D'ho conservi diouz drouc-speret
 Er veach oc'h eus antreprenet.

Ho pet sonch ac'hanomp bepret,
 Rac tost eo an enemiet ;
 Judith, ho pet calz a sourci ,
 Allas ! prest voar da gonsbati.

Santinel an Enemiet.

Pelec'h e zit , Princes yaouanq ?
 Ho qenet a zo ravissant ;
 Perac tra en em exposi
 Da gaout qement all a sourci ?

Chom allac'h e paciantet ,
 Espern ho poan hac ho yec'het ;
 Evelse n'em brecipitit :
 Livirit petra a glisquit.

Judith.

En em recour a meus sonjet ;
 Qen terrubl e zon gourdrouset ,
 Mar clasq ar bobl oc'h insulti ,
 Ma fell din n'em sovetai.

Me a garfe , hep drouc ebet ,
 Caout an enor , mar permetet ,
 Da barlant eus ho Coronal
 Holofernes , Roue , General.

Ar Zoudardet.

Ni a yêlo d'ho cundai ,

Princes , oll gant hor mousqed ,
 Ilac ho rento hep drouc ebet
 Bete'r C'horonal assuret.

Judith.

Roue puissant Holofernes ,
 Rampart an oll binvidiguez ,
 Me garre em be , emezi ,
 Ur guinou aour vit ho meuli.

Eus bo Majeste an eclat
 A ra din mont qen agreabl ,
 Monet a ran var va daoulin
 Dirac ho Majeste divin.

Holofernes.

Princes , deut d'en em assuri ;
 Me ho ped , ah ! na grenit mui :
 Ho qenet en deus va charmet
 En instant ma meus ho quelet.

Va zaoulagad ha va c'halon
 Zo en em ravisset quer don ;
 Savit prontamant en ho sa ,
 Me eo , emeza , a dle soubla.

Judit , contit din ar sujet
 P'evit tra oc'h amâ deuet ;
 Ha mar deus poan var ho speret ,
 Certen e viot delivret.

Va c'halon zo e captivite ;
 C'houi ell e denna ac'hane :

Netra tout dêc'h na refusin,
Ma accordit ar c'hraç-se din.

Judith.

D'ar famin e zint reduiset ;
Eva reont goad an anevalet :
Va sicour allen dêc'h presta
Evit donet da resista.

Holofernes.

Princes , cetu me tout charmet
Dre'n eloqanç eus ho quelet ,
Ne meus sonch nemet ac'hanoc'h ,
Va oll fizianç a zo ennoc'h.

A bep hent oc'h eus desarmet
Holofernes , Roue an Egyptet ;
Me ro dêc'h graçou souveren ,
Commandit c'houi hivisiqen.

Judith.

Mar permetit , dre ho madelez ,
E chomin gant va zervicheres
Da veva herves va lezen ,
Yac'hoc'h calz en em gomporten.

Mont a rin partout da vale
Dre ar vro ha dre ar e'hontre :
Mar em lezit en liberte ,
Me a bedo bepret Doue.

Holofernes.

Princes , noc'h eus nemet pourmen ,

En em gundai herves ho lezen ;
 It da vale dre va arme,
 Me ho recommando deze.

Nep rai droug dêc'h , m'o sunisso ,
 Rac souden ez int d'ar maro
 Nep a guemero effronteri
 E nep fêcen d'oc'h insulti.

Deut da velet va zenzoriou .
 Va aour ha va oll finançou ;
 Dêc'h-u int , mar qirit iveau ,
 Ma ne chenchit a volontez.

Me ya da dressa ur rejet ,
 Ma valeot elec'h ma queret ;
 Mont a ran d'ho recommandi
 Ma teuy va fobl d'oc'h enori.

Vagao , prepar ur banquet
 Evit ma teuo d'au guelet
 Ar pennou bras eus va armz .
 C'hoant bras a meus da gomz oute.

Me a esper dre da gaqet
 Judith a dle beza charmet :
 Qè buan da laret dezi
 Dont fennos da goannia d'am zy.

Vagao.

Princes , c'houi oc'h eus gonezet
 Graç vad ar Roue assuret ;
 Bete bremâ oc'h eus guelet
 An amltie en deus bepret.

Dêc'h netra ne al da refus ,
 Var e zanvez oc'h ar vestres ;
 Digasset on d'ho supplia
 Da zont fennos d'y da goania.

Judith.

Autrou , me voar em c'hemerit
 Dreist va enor ha va merit ;
 Mont a rân ganêc'h assambles
 Da veza d'ho Mestr servicheres.

Un enor bras ê memes din
 Servicha ur Mestr zo quer din ;
 Ur Roue quer douz , quer charmant ,
 Quer puissant ha quer vaillant.

Judith hac Holofernes.

Prinç , va Mestr , na veritân qet
 Beza ouz ho tol recevet ;
 Mes sclér e velân ho calon
 Carguet evidon a affection.

Hep compliment ec'h azeàn ,
 En ho qichen sur e toslân ,
 Evit contanti ho speret ,
 Ha renta d'an oll joaüstet.

Holofernes.

Plijadur bras a guemerân
 Ouz ho quelet em c'hichen bremân ,
 A c'hraçou bras em oblijet ,
 Va c'halon zo rejouisset .

Dibrit , evit , herves ho cout ,
 Me servich dêc'h a bep tra tout ;
 Rac me hac ar gompagnuez
 A zo charmet ganêc'h , Princes.

Arabat eo ober compliment
 En ur fest zo qen excelant ;
 Yac'h , dispos , debrit hac esit ,
 Evit sur er fin e sonjit.

Judith.

Va Frinç , va Autrou , accordit din
 Ar c'hraç na davin qet ho cuin
 En ur fest a zo qen charmant ,
 Qer caer ha qen rejouissant.

Holofernes.

Me ya da eva d'ho yec'het
 Assambles gant va mignonet ;
 Gant joa vrás ha rejouissanc ,
 Ravisset omp en assuranç.

Juditih.

Vagao , an amzer zo deuet ,
 Poent eo cass ho Mestr da gousqet :
 Goloit-én gant e lincelliou ,
 Hac hon lezit amâ hon daou.

Roit din ar c'hraç , va Doue ,
 Hac an nerz d'am breac'h ive ,
 M'ellin gant ur goutelacen
 Dont da drec'hi d'ar monstr e Lenn.

Evelse o pedi Done ,
 Judith o tostat ouz e vele .
 Gant un tol e deus dibennet
 Ar monstr evel ur milliguet.

Servicheres , tosta amâ ,
 Ne c'heus asser mui da grena :
 Dal ar penn-mâ evit cuzet ,
 Lezomp ar Prioç amâ da gousqet.

Doue ra vezò trugareqet ,
 Ar vech-mâ e zomp delivret ;
 Partia ellomp hep spont ebet ,
 Ar passach zo deomp permetet.

Va breudeur , deomp-ni digoret :
 Doue en deus hon delivret.
 Admiromp eta ar vertus
 Eus ur Brinces qer courajus.

Doue en deveus permetet ,
 Dre zorn ur plac'h dister meutbet ,
 Dont da zibenna ur geant
 A sonje beza oll-buissant.

Doue dre e zaouarn puissant
 En deus grêt din beza contant :
 Holofernes zo bet lazet ;
 Cetu amâ e benn da velet.

Evit test e c'halvàn an ên
 Oun sortiet pur ac'hane ;
 Va Æl-mad en deus va miret
 Qer pur vel ma zoan antreet.

Gant soign en deus va c'hunduet,
 Injur ebet na meus souffret;
 Rentomp dezàn hon enoriou,
 Gloar ha peb seurt meuleudiou.

Judith.

Alchior, ha te a ene
 Penn Holofernes, ar Roue?
 Cetu-en aze o tivoada,
 Hac e gorf commancet da vreina.

Alchior, en em c'hra Christen,
 Hac en em zoumet d'hon lezen,
 Na ve c'hoarvout a rae ganes
 Evel gant Roue Holofernes.

Alchior.

Judith, ia, a greiz va c'halon
 Me a gred e Toue güirion;
 Me zo prest d'en em soumetti
 Qercoulz ha c'houi d'e adori.

Me gred e Doue eternel
 Hac én ar Mestr universel,
 Contant oun da veza Christen,
 Joa bras a meus ouz e lezen.

Judith.

Deomp var an enemiet,
 Ma vo ar victor achuet;
 Cousqet int oll bremâ dija:
 Sonit an drompson d'o difuna.

Greomp seblant d'o c'hombati ,
 Evit caout leac'h d'o choqi ;
 Rac pa velint ar gontel-mâ
 Leun a c'hood , e teuint da sponta.

Pa e guelo ar zoudardet ,
 An arme vezò deroutet :
 Sonit ar gombat , trompillou ,
 Ma zai'r zoudardet d'o fostou.

Ar Santinal.

Vagao , ît da zifuna
 Ar General , contit dezâ
 E ranqer bremâ combati
 Ouz an arme a Vethuli.

Lavarit dezàn difuna ;
 Ar gardou aroc a dosta :
 Ne fot nemet e gommandamant
 Da livra ur gombat sanglant.

Vagao.

Va C'choronal , pront difunet ,
 Commanç ar gombat a zo prest ;
 An enemiet zo deut varnomp ,
 Hac a ra goap eus ac'hanomp .

Emê'r maleur zo êruet
 En nes-mâ sur , va mignonet !
 Hor General zo dibennet
 Dre e finessa gant Judith.

Collet omp tout , ret eo tec'het ,

Pa zeo ar C'horonal dibennet :
 Tec'homp diouz Doue Israël ,
 A ra deomp ur glac'har mortel.

Ar Pontifet hac ar Vêleyen a Vethuli.

Criomp buez bir da Judith ,
 Hor Brinces fur , leun a verit ,
 Ha nerz d'e brec'h victorius ,
 Pe dre hini Doue zo glorius.

Canit oll gloar Jerusalem ,
 D'ar Brinces Judith , peb Christen ,
 E deus lazet un den cruel ,
 Evit delivra pobl Israël.

Deomp d'an Ilis tout assambles
 Da gana canticou nevez ,
 Evit meuli e Vajeste
 Ha dont da veuli hon Doue.

Offromp hor c'halon da Zoue ,
 Hor c'horf , hor speret , hon ene ,
 Pa vezor buez finisset ,
 M'on recevo er joaüstet.

F I N.